

# CANTICO

VOAR BUEZ

## Santes Anastas,

*Voar don Guerz Lochrist an iselved.*

---

Pobl a Vreiz-Izel, me ho ped,  
Didostaït amà da glevet  
Ar miraclou a rear bemdeiz  
E quichen ar Funteun-Nevez.

Endre a Lambol Bodenes  
Ema'r funteun ar santes,  
A bell amser-zo negliget,  
Ha gant an oll ancouanachet.

Mes Doüe a vereq poënt da boënt  
An amser da bier ar sænt;  
Hac a bermet gant ar funteun-ze  
Ober miraclou adare.

Speret-Santel, me ho suppli  
Donet bremâ da gundui

Va fluen, pa zean de scriva  
Ar burzudou a rear amâ.

Santes Anastas, merzerès,  
A beder ar funteun nevez:  
Pedet-hi a galon fervant  
Hac a reio d'each soulajamant.

Brema a eus eur tri cant bloas  
Er plaçz ma rer miraclou bras.  
Mes neuse a oa ordrenet  
Ma vije ar funteun goloet.

Goloet e voue en effet;  
Mes couscoude ne ele'hont quet  
Coll ar sourcen a yoa crenv bras  
Ma red bremâ evel biscoas.

Mes abars coumanç rapporti  
Ar burzudou so great enni,  
Guellomp eun darn ves ar vuez  
Eus a Anastas ar santes.

A gastel Coat-meur a yoa guinidicq,  
A lignez nobl ha pinvidicq.  
Mes an histor na rapport quet  
An amzer ma ze bet ganet.

Pa oua deat an oad a roeroun  
 E voue douguet d'an oroesoun  
 Gant e vam vad, santes Bider,  
 Eun itroun vras ves ar c'hartier.

O div eta en em dennent  
 En ur vengleuz, è corn an hent  
 E yoa e hars ar c'hoat  
 Da bedi ar Verchcs hac e vab.

Pa voue deut an oad a bempzec vloas  
 E zad ractal e brometas  
 D'he qinterv compés da bried,  
 Ar c'hont Artur a yoa hanvet.

Gret e devoue veu da Zoüe  
 Da viret he gouirginité;  
 Hac ar c'hellou pa glêvas  
 Gant fermeté ho refusas.

Ar c'hont Artur a bartias  
 Eus e gastel gant eun train vras,  
 Da renta bisit d'ar santes,  
 Assambles gant tud e bales.

Erruet ma voent e castel Tromin  
 E peleach edo e resin,

E goulenc'hont an demezel,  
A yoa sortiet eus ar c'hastel.

Casset e voue neuse timat  
Domestiquet j'abers e zad  
Da zont d'he clasq da zimezi.  
Mes den ne gave anesi.

Nemet e mam na ouie den  
Peleac'h edo gant e feden  
A redas gant an hent assur  
D'he glasq da gaout ar cont Artur.

Annonç a reas d'ar brinces  
Petra a yoa a nevez,  
Hac a rencje, hep dale pel,  
Distrei ur moment d'ar castel.

Donet a ra ep retard d'ar guer  
Gant e mam vad, santes Bider,  
Hac erruet ê tal an or  
Ar cont e receo gant enor.

Ep lavaret guer ebet  
Er saludas gant peb respect.  
Trist er castel a c'hantreas,  
Ar cont Artur e remerqas.

E'zad neuse a bartias  
 Eus e gastel gant eun train vras  
 Evit rei quelou hed da hed  
 A solanité an euret.

Ar cont Penhoat hac e bried  
 Neuse, gant cals a joausted,  
 A bartias, eb dale nemeur,  
 Da zonet da gastel Coat-Meur.

Arruet ma voent er castel,  
 E c'houlenc'hont an demezel,  
 Hac a rejont cals a reveranç  
 D'an assemble eus an noblanç.

E zad neuse a ordrenas  
 Ober prepari ur repas,  
 Pehini a vije presantet  
 An deiz ma vije an euret.

An oll a yoa laouen bras  
 Nemet ar brinces Anastas.  
 Ractal en e sao a savas,  
 D'he zad evellen a compsas :

« Va zad, me a meus eur pried  
 « A n'er chenc'hin oc'h pried ebet,

« Ar caera deus ar priejou ,  
 « Jesus va mestr ha va autrou.

« En eo en deveus va frenet ,  
 « D'am saveti e c'hoad 'scuillet.  
 « E bedi a ran deiz a nos  
 « D'am receo en e barados.

« Ne deus na baron na marquis  
 « A rafe din cenc'h a zivis ,  
 « A ne quet poent din, va zad quer  
 « Preferi eur cont d'am Salver. »

E zad a antreas e coler,  
 Ac a ordrenas var ar guer  
 E ranfermi en eun dourel,  
 A yoa e guelet ar castel.

Ne roe desi da veva  
 Nemet dour hac eun neubeut fa ;  
 Mes hi, en eur bedi Doue,  
 A voue ato joaüis ha gue.

E sat a gassas d'he guelet  
 Eur sorceres fal, milliguet,  
 Pini gant compsou an douça  
 A reas e fossubl d'he drompla.

Mes Doïe, leun a vadelez,  
 A douc'h calon ar sorceres,  
 A ra desi guëla bepret  
 Gant eur guir regret d'he pechet.

D'an daoulin dirac Anastas  
 E teuas d'he fedo gant feiz vras  
 Da bedi Doïe evity  
 Ma roje ar pardon desi.

Ar santes humbl a brometas.  
 Desi ractal e c'hordrenas  
 Sortial prest eus e gichen,  
 Ha monet da ober pinigen.

Hi voar ar guer a savas;  
 Quenta voaran hent a gavas  
 E voue ar cont o chasseal  
 Pini a deuas d'he gaout ractal.

Hep en em deport da parlant,  
 E comps outan en istant:  
 « Red eo, emesi, hep dale,  
 « Lacquat ho merc'h ê liberte.

» Ne deus moyen a ve gnelloc'h,  
 « Na foeçon a ve assuroc'h

» Da ober dezi consanti  
« Dont hep dale da zemisi. »

Ar cont a retornas d'ar guer  
Da gaout e bried, santes Bider,  
Hac a roas dezi an alchues  
Da lacquat emerc'h è liberté.

Epad m'edo è liberte  
Ne n'ê james o vale :  
O visita an dud affliget,  
Attaquet gant a bep seurt clenvet.

E c'hender, hed an amzer-ze,  
D'e zad ato a lavare,  
E raje dezan brezel bras  
Ma na eureuche Anastas.

Ranfermet e oue a neves  
En eur c'haø tevoal, ar santes,  
Ha roët dezi eur mis amzer  
Da gonsanti da rei e guer.

Mese mam a gavas cousquet  
Ar cont a Goat-Meur, e fried,  
Hac a laeras an alchues,  
Da losquel er mes ar santes.

Anastas, hep eun em guset,  
 Er groten eun em gave bepret;  
 Rac eno, en e oreson,  
 A gave douçder e galon.

Pa voue an amzer achuet,  
 Ar cont Artur a savas abret  
 Eun arme a yoa crenv bras,  
 Da forci ar brinces Anastas.

Retorn a reas d'ar c'hastel  
 Discleria d'abor ar brezel,  
 Rac ma renque e eureuji,  
 Mad pe droucq vije ganti.

E dad, seziet gant ar spont;  
 A eas d'e glacq prest ha pront,  
 Gantan dessin d'e força;  
 Mes allas! ne gavas netra...

Antren a reas en e guer  
 En eun transport, hac en eur goler;  
 Gantan desir da sibenna  
 E verc'h, crouadur an douça.

E caout a reas var e daoulin,  
 E c'hadori e mestr divin,

Hac evel eur bleiz arraget  
Ractal en deus i dibennet.

E goat pur, chast ha virginal,  
A redas er funteun ractal,  
Hac e leac'h donet de sroubli  
A deuas da scleratanesi.

E mam, ar malheur pa glevas,  
Gant glac'har vras eun em rentas,  
E quichen e merc'h dibennet,  
A ioa dija e gorf sclacet.

Quement a reas itronesed  
Er fin ma voue sebeliet;  
Retornet d'ar c'hastel ganti,  
Evit ambomi anezi.

Artur, ar malheur pa glêvas,  
D'an douïar maro a goesas.  
E gorf, casset da di e dad,  
A chomm ê castel Penhoat.

Voar ben peder heur varnugent  
E zad a barti er moment;  
Monet a eure da bel bro,  
Ha ne zigassas james quelou.

Chetu ar fin eurus meurbet  
 Eus a Anastas benniguet;  
 Mes ar miraclou e deus gre  
 So en tu al d'am speret.

Tud mud, tud dal, tud affliget,  
 Tud bet privet eus ar c'herset,  
 Tud paralitiq, ha bousar,  
 Pere so bremâ var an doüar,

Deut da rei testeni bepret  
 D'ar pes so gret en oc'h andret,  
 Disclerit d'an oll var eun  
 E zeoc'h gret salo er funteun.

Peleach e ma oc'h-u, pelerinet  
 So brema en o pesiou cousquet?  
 Savet evit rei testeni  
 D'ar miraclou so gret enni:

Savit oll mes o pesiou  
 Da genfonti an teodadou,  
 O deus a eneb parlantet,  
 Possedet gant an droucq-speret.

Adversourien int da Zoüe,  
 D'ar sent, d'e vignonet ive;

Mes eun devez e ouëlint chuëro,  
Pa veso divesât deso.

List da goms an neb a garo,  
A da bublia dre ar vro :  
« Ne rer quet a viraclou bras  
« E quever funteun Anastas. »

Deut ato, deut, tud affliget,  
Da bardonna gant peb respect  
D'ar funteun gant devotion,  
Hac e recefot ar pardon.

Santes Anastas, m o ped,  
Pedit or Salver benniguet  
Da exauci or pedennou,  
Evit ma zaimp oll d'an evou.

FIN.